



DISPUT

ETRE AR MARO HAC AN DEN YAOUANQ

Ar Maro.

Cete me éru, va mignon,
Da ober dit renta réson
Demeus da vue tremenet,
Scuis eo Done ous da velet.

An den Yaouanq.

Autro Done, pion eo emân
A zo deut quen dizonj amân?
Ma speret a zo oll troublet
Gant epouvant eus e glevet.

Ar Maro.

Petra lavares, va mignon?
Lez da spont ha cont da réson
Ha aa vouies-te get ervad
E teujen abred pe divezad?

An Den Yaouanq.

Allas! sivoas, ne vouien quet
E tleac'h donet qen abret;
Me zonje din, pa voan dispos,
Ne varvjen, qen e vijen côs.

Ar Maro.

Mes alies e poa clêvet
Ne meus biscoas den espernet,
Hac e tlean an oll falc'had,
Côs ha yaouanq eus a heb oad.

An Den Yaouanq.

Allas! sivoas, en joa ar bed
E voa ma speret occupet;
Em yaouanquis voà va fianç,
Hac em mignon va esperanç.

Ar Maro.

Penos den sot hac aheurtet,
Ne voas-te get avertisset
Da reformi da voal vue,
Pa ne voas quet sur a un de?

An Den Yaouanq.

Allas! me vel on faziet;
Mar plij ganéc'h choas, deportet
Roit din c'hoas termen,
Ma rin qent mervel pinijen.

Ar Maro.

Penos e fel dide ober
Pinijen en gen ber amzer,
Pa ne c'heus gret bete vrëman.
Ha te pell zo var ar bed-man?

An Den Yaouanq.

Me bromet dec'h a dra certain,
E rin prontamant pinijen
Da repari ma yaouanquis.
Ma roit din termen eur mis.

Ar Maro.

Avoalc'h eus bet a amser,
Ma carjes ober da zevel;
Mes alles pelloc'h appel :
Eru an heur ret é mervel.

An Den Yaouanq.

Pe n'en dê qet ho polante
Va lezel quet-se en lue.
Ma plij ganec'h, da vianan,
Un devez c'hoas a c'houlenan.

Ar Maro.

Harça ! bremâ paciantet :
Eru an heur, ret é monet ;
Rac-se-ra, sonj es coall vuc,
Ret é monet dirac Doue.

An Den Yaouanq.

Penos eta, mervel so ret
A greiz va nerz ha va yec'h et !
Penos quittat va desseniou,
Va joa, va c'herent, va madou ?

Ar Maro.

Diveat out bremâ da vouela,
Homan é da heur divea :
E zan da réi did an tol marvel ;
En heur-mâ e renques mervel.

An Den Yaouanq.

E C'HOULEN SICOUR DIGANT E
GUERENT HA MIGNONET.

O va c'herent ha mignonet,
E han' Doue, va zikouret :
Scoet ouu gantan d'ar maro :
Deut d'am zicour, hastit afo.

Ar Guerent hac ar Mignonet.

Evit breman ce allomp qet,
Beza hon eus ar affer bresset ;
Pa retoroimp, ni a velo,
N'oc'h eus qet a féçon maro.

Ar Maro.

Güel, den zot ha den abeuriet,
Petra respont da vignonet !

Anzao breman den divis,
Peguer tromplus é yaouanquis !

An Den Yaouanq.

Güir a larit, me zo tromplet
Gant yaouanquis ha mignonet :
Bremen me ro dé mil mallos ;
D'am oll malheur e zint bet caus.

An Den Yaouanq.

E C'HOULEN SICOUR DIGANT DOUE
HAC AR VERC'HEZ.

Me ho suppli, ô va Jesus !
Ha c'hui, Güerc'hez, Mam druezus,
Me ho ped dre o madelez,
D'am zicour c'hoas, mepec'herqez.

An Autro Doue.

Penos en teus an assurance,
Da c'houlén ouzomp asistance ?
Bepret out bet hon adversour ;
Petra ve d'emp-ni da zicour.

An Den Yaouanq.

E C'HOULEN SICOUR DIGANT AR ZENT.

O Zent, mignonet da Zoue,
Ho ped truez ous va ene !
Gant an oll oun abandonnet ;
En han' Doue va zicouret,

Ar Zent.

Penos ec'h eus an hardisson
Da c'houlén hor protection !
Ne c'heus qet mivet hor goueliou,
Nac imitet hon vertuziou.

An Pen Yaouanq.

E C'HOULEN SICOUR DIGANT E
ÆL-MAD.

O va Æl-mad ! ô va den qer !
Var gardien en ped amzer,
M'ho ped, va sicourit brema
Em necessite diveza,

An Æl.

Quement a ellen a meus grêt :
Bete vremen en da andret :
Poent e zeo din d'abandoni,
Pa ne teus qet sentel ouzin.

An Den Yaouanq.

Me vel ervad é tremenet
Va amzer da veza sicouret ;
Bevet a meus en libertin,
Done a rent justic erlin.

Em maro em diles Doue,
Pa 'm boa 'n dilezet em bue ;
Resistet meus d'e oll græou
Hac em refos em goulennoù.

An Den Yaouanq.

E QUITAD HE GUERENT HAG HE
VIGNONET.

Bilesett onn en abandandon ;
N'en dens mui evidon pardon.
Adieu, qerent ha mignonet,
Adieu, bed fall ha miliguet.

An Den Yaouanq.

E QUITAT JOAUSDET AR BED-MAN.

Adieu, grandeur ha bombançon,
Enoriou vên ha triomphou ;

Adieu d'an traou eus an donar ;
Adieu d'an êe, adieu d'he c'hloar.

Mallos d'ar vam, mallos d'an tad
A zo bet ouzin quen ingrat,
M'o dens grêt din coll va ene,
D'am beza lezet em liberte.

E zau da aeza entéret
En ifern gant an dud daonet,
Da lesqui ebars er flammou,
Da james gant an diaoulou.

Ha possubl ve, ô va Done,
E serfoc'h ouzomp dor an êe !
Obtenit d'emp, ô va Zalver ?
Eur plaç en ho cloar eternal.



(Propriété.)

Lanhuon, en ty intanvez Ar Goffic.

